

**KELC'H
SEVENADUREL
BREZONEK
ROAZON**



**ABADENN
VREZONEK**

**ROAZON
d'an 10 a viz Mae 1964**

ROAZON

10 A VIZ MAE 1964.

PALEZ ST - JORD

A B A D E N N V R E Z O N E K

AOZET GANT KELC'H SEVENADUREL BREZONEK ROAZON

T A O L E N N - D A N V E Z I O U

L O D E N N G E N T A

E I L L O D E N N

1. LAZ-SENI (eus K.S.B.R.)
 - Heuliad toniou poblek kempennet gant Alex Goussin : "son ar yar", "ar paour-kaez Lanig", "son ar yar".
2. LAZ-KANA (eus K.S.B.R.)
 - "Ezennig flour", ton poblek eiltoniet gant F. Danno, barzoneg gant Filomena Kadoret.
 - "War bont Landreger", ton poblek eiltoniet gant F. Danno, komzou gant Evnig Penn ar C'hoad.
 - "E traon ar menez", ton iwerzonek eiltoniet gant F. Danno; komzou gant Evnig Penn ar C'hoad.
 - "Son an tantad", ton ha komzou gant F. Danno.
3. LODENNIG KENTA eus an abadenn savet gant skoazell tud ar sal.
 - Goulennet e vo digant tud eus ar sal dont da gana, da zibuna istoriou, da gomz, ... war al letr-c'hoari.
 - Lakaet e vo tud ar sal da gana a-gevret.
4. C'HOARIVA (gant strollad K.S.B.R.)
 - "An alc'houez", pezig-c'hoari savet gant Per-Jakez Helias.
5. PETRA EO KELC'H SEVENADUREL BREZONEK ROAZON ?
 - Tamm prezegennig gant J.P. Duval, rener K.S.B.R.

E H A N

E-pad an ehan, arabat ankounac'haat ar stal leoriou brezonek, ar stal evachou, hag an tresadennoù savet gant Langleiz - hag a vo sinet gantañ - gwerzet evit degas eun nebeut gwenneien da gef kenskoazell ar C'helc'h (evit kinnig profou ha predou da vrezonegerien goz ha dizanvez).

1. LAZ-SENI (eus K.S.B.R.)
 - An hevelep euliad gant "Ar vatez vihan"ouspenn.
2. LAZ-KANA (eus K.S.B.R.)
 - "Kleier Kemper", son gant Polig Monjarret , komzou gant J.P. Helias.
 - "Paotred Rosko", ton eus Bro-Gembre, komzou gant Marc'heg Arvor.
 - "Milinerez Pontaro", ton poblek eiltoniet gant Jef ar Penven.
 - "Mik, mik, mik...", ton poblek eiltoniet gant Jef ar Penven.
3. EIL LODENNIG aus an abadenn savet gant skoazell tud ar sal.
4. LAZ-SENI (eus K.S.B.R.)
 - "Adagio", eus Guy Ropartz, da geñver 100^{vet} deiz-ha-bloaz ganedigez ar soner Breizad brudet-se.
5. C'HOARIVA (gant strollad K.S.B.R.)
 - "Karr-kañv an Aotrou Maer", pezig-c'hoari savet gant Youenn Drezen.
 - . Arvest kenta : bodadeg ar c'huzul-kêr e ti-kêr eur gumun eus ar vro-Vigoudenn.
 - . Eil arvest : badeziant ar c'harr en ostaliri Yann Rafalen.
 - . Trede arvest : e-pad an noz e traonienn Pont-Palore.
 - . Pevare arvest : war blasenn ar vourc'h da vare an anjeluz-beure.
6. "BRO GOZ VA ZADOU" (gant al laz-seni ha tud ar sal & kana).

" KELC'H SEVENADUREL BREZONEK ROAZON "

(Cercle Culturel de Langue Bretonne de Rennes) a zo :

- e lavarenn-stur : "Ober evit ha dre ar brezoneg"
- e chomlec'h : 30, Leurgêr al Lisoù (Place des Lices)
- e oberiantizou : bodadegou sevenadurel brezonek ,
bep sadorn, da 21eur - kenteliou brezoneg - levraoueg-
Las-seni - laz-kana- strollad c'hoariva - kevrenn
vugale - bodadegou brezonegerien - hag all...

Evit gouzout hiroc'h diwar e benn, skrivit dezañ,
pe - gwelloc'h - deuit d'e vodadegou !

Respontit mar plij war bajenn an tu dehou d'ar
goulennou-mañ :

- 1) Ha plijet he-deus - pe displijet he-deus -
deoc'h hon ABADENN VREZONEK kenta ?
- 2) Petra ho-peus kavet ar gwella ?
- 3) Petra n'ho-peus ket kavet ken mat ?
- 4) Kinnigit deomp ho menozioù evit hon abadennou
brezonek a zeu.
- 5) M'oc'h bet dedennet gant on abadenn, ha m'ho-peus
c'hoant beza kouviet er bloaz a zeu, ma plijfe deoc'h
gouzout hiroc'h diwar-bennhor c'helc'h hag e oberiantizou,
roit deomp, mar plij deoc'h : hoc'h ano, ho comlec'h resis
(e galleg : adresse précise) hag eus peseurt korn-bro oc'h.

Trugarez, ha kenavo ar c'henta !

